

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

14. AR PLAC'HIG SEIZ VLOAZ

Mar plij ganehoc'h e selaoufed
 eur verz nevez ° kompozet °a-us : zo
 d'eur plac'h seiz vloaz ez eo gret.
 he mam diganthe zo marvet
 he zad a zo eur c'hos mesvier
 eunn didalvez, eur butuner.
 ar verc'h en noz ouz al loar skler
 a ia da glask he zad d'ar ger.
 hag he zad o tont d'he fed
 da zonet gant han barz enn ti
 evit rei dezhi da eva,
 evit he lakat da vesvia.
 - N'evinn banne ha nep banne
 va zad, /enezi, deut/° alese. °a-us: deut d'ar gear
 pa oant /euz/° meaz ann hostaleri °a-us: e
 da zont° a goste 'pedaz anezhi. °a-us: /hen he fedaz/
 - Va zad, eme hi, ne dinn ket
 ne dinn d'ober eur seurt pec'hed.
 - Ma ne res-te ket ar pec'hed
 te 'iel warc'hoaz da glask da voued.
 - Gwell eo ganen mont da glask boued
 evit ober eur seurt pec'hed.
 Tri zervez hanter ez eo bet
 hep kabut bruzunen ed ebet
 hag hi da antren enn eun ti,
 goul eun tamm bara da zibri.
 Ar c'hrek dezhi he deuz laret :
 - It alese da c'hounid boued.
 hag hi da vonet ac'hane
 da bignat enn eur park neuze
 da c'hout hag hi 'gavje 'r c'hreunen
 a roje d'he c'haloun souden.
 Dre gemend m'he deveuz baleet
 ne deuz kavet greunen ebet.
 etal ar gouent eo arruet :
 goulen kovez hi e deuz gret,
 ma raje he c'hemunion genta
 kent monct diwar ar bed-ma.
 pa roet dezhi eur binijen
 /arruet ar/° verc'hez enn he c'hichen °a-us : setu 'r

- 46 -

- Perak e roez-té pinijen
da eunn eal zo gwisket e gwen
hounnez a zeui ganen d'am zi
ha te choumo enn da hini.
el leac'h m'oa bet o c'houlén boued,
ar vrek he doa he reuzet
he holl madou a zo devet
hep n'oe gwelet /na/ tan na moged

vvvvvvv